


BNL-4-019

PARREZ SCRIGNAC



IMPRIMATUR :

Kemper, 8 a viz Ebrel 1933.

A. COGNEAU, V. g.

GWERZ ITRON VARIA GOATKEO

ha

PEDENN DA ITRON VARIA GOATKEO

GWERZ ITRON VARIA GOATKEO

I. — ISTOR AN AMZERIOU KOSA

War don Kelven.

DISKAN :

*Itron Varia Goatkeo,
Bezit aq̄ hor Mamm.
Klevit pedenn tud ho treo,
Eus ho tron nevez flamm ;
Grit ma pignimp eun devez,
Eus traonienn an daerou,
Betek kribenn ar menez,
A zoug tron hon Aotrou !*

I

Aman e kreiz ar c'hoodou,
E traon Menez Are,
Breman mil bлоaz hon tadou,
O Mari, hо kare ;
Savet o doa eur chapel
Hag e oa eun dudi,
Dont eus ar peder avel
Enni d'ho saludi.

II

Uheloc'h war an dosenn
E oa eur c'hastell krenv
Hag e weled e voudenn,
A-bell, gwintet en nen.
Eno madou an douar
A veze diouallet
Hag en o chapel glouar,
Re an ene harpet !

III

Siouaz ! an traou padusa,
Ar vein koulz hag an dir,
Tamm ha tamм deu da uza,
Tri c'chant vloaz a zo hir.
Er pevarzekvet kantved,
Ho chapel a oa fall,
Gand ar Pab (1) e voed galvet
Da zevel d'eoc'h eun all.

IV

Hoc'h eil chapel a badas
Pemp kant vloaz penn-da-benn ;
Hon tud enni a gavas
Peoc'h en o foaniou tenn.
Hag eur bern testeniou
A lavare d'an holl,
Staget ouz he mogeriou,
Piou a virec'h diouz koll !

V

Pa zigoueze ho pardon
 E veze levenez,
 War dal koulz hag e kalon
 Kerneviz ar menez ;
 A bep tu a vilierou,
 Gant bannieiou ha kroaz
 E teuent dre goz hentchou
 D'ho saludi bep bloaz.



II. — ISTOR AN AMZERIOU ENTRE

VI

Pa grogas er gristenien,
 Skilfou an Dispac'h Ruz
 Ha p'edo ar veleien
 O veva dindan guz,
 Koatkeo eo a voe kalon
 Parrez Skrignag a-bez,
 Eno e kaved pardon,
 A-raok diskenn er bez.

VII

Pa oa Skrignag hep beleg,
 Prizoniet m'oant o zri, (2)
 Hag ar Re-Chlas o redek
 Hag o furcha pep ti ;
 Eur beleg, evelato,
 Hini douar Koadkeo,
 Gloada Jegou e hano,
 A gredas chom en dreo (3).

VIII

Person Skrignag e Kemper,
 Bac'het a varvas prest ; (4)
 Hini Poullaouen, merzer,
 A voe lazet e Brest ; (5)
 Korf maro 'n Aotrou Jegou,
 A voe kavet en noz, (6)
 En unan eus an hentchou
 A gas d'ar chapel goz.

IX

O zri e chomo staget
 O hano ouz Koatkeo,
 Hag o zri ez int marvet
 'Vit derc'hel ar feiz beo ;
 Aman o deus bet pedet,
 Mamm Doue meur a dro ;
 Dudi 'gavint o welet,
 Eo karet c'hoaz er vro.

X

E bloaveziou diwéza
 An naontekvet kantved
 E voe lezet da goueza
 Ho pardon bras karet ;
 Hent ho chapel bet pleustret
 Gant hon tud koz, gant pres.
 A voe siouaz dilezet
 Ha goloet a zrez.



III. — ISTOR AN AMZERIOU BREMAN

XI

Daoust da-ze, tud niverus,
 Aman war o zreid noaz
 Epad ar brezel euzus
 A badas tost pemp bloaz
 A rae teir zro d'ho pered,
 D'ho kroaz, d'ho feunteun c'hlan
 Ha d'o ti hanter gouezet,
 Evid o zud en tan.

XII

Er peoc'h, an traou distera,
 A wella tamm ha tamm ;
 Er brezel an traou kaera,
 O devez founnus lamm ;
 Hentchou Koatkeo a ouelas,
 Dindan o girzier drein
 D'an deiz a gany ma tec'has
 Ac'hano ar zent mein.



XIII

Daoust pegen trist oa gwelet
 Koatkeo dismantret holl,
 E chome beo er spered,
 Ne 'z aje ket da goll ;
 « Eun trezou dir, a lared,
 « 'Zo bet uzet eno,
 « Eur re nevez 'vo savet,
 « Hep fin ebed d'ezo ! »

XIV

Ivinou lemim an amzer,
 Lezouregez an dud,
 A labouro en aner,
 Da zispenn d'eoc'h ho prud ;
 Tra ma vo mein er menez,
 Ha dero er c'hoadou.
 Ho pezo ti, o Gwerc'hez,
 E bro goz hon tadou.

XV

Eleiz a draou a gouezo
 Met biken e Koatkeo,
 Nann, birviken, ne vez
 Trech' ar maro d'ar beo ;
 Noaz eo 'vel ar gwez dero,
 Epad ar miziou du ;
 Sae nevez a gemero
 Ha bleun koant a bep tu.

DISKAN DA GLOZA AR WERZ :

Mil bloaz a zo ma sec'hit,
Daerou an dud aman
Chomit ganeomp ha bezit
Ato, mamm ar vro-man ;
Hor c'hasif daved Jezuz
Ho Mab hag hor Barner,
Ha bezit trugarezus
Ouzomp e peb amzer.

Y.-V. PERROT.

SKLERIJENN

(1) Klement VII, er bloaz 1388.

(2) An A. Bernard, gand e zaou gure, an A. Hascoët hag an A. Brelivet, a voe prizoniet e Kastell Brest d'an 3 a viz Meurz 1792.

(3) An A. Jegou a oa bet ganet er Wern-Uhel, e Skrignag, d'ar 15 a viz Mae 1755.

(4) Eus Kastell Brest, el lec'h ma oa c'hoaz d'ar 24 a viz ar Foennou 1792, an A. Stephan Bernard a voe kaset da Gemper ha prizoniet, e Kerlot, el lerc'h ma varvas d'ar 17 a viz Mezeven 1793.

(5) An A. F. ar C'hoz oa e hanoo ; ganet e oa bet e douar Kolloreg, e Ploneye ar Faou, d'ar 16 a viz Genver 1746 ; dibennet e voe e Brest d'an 13 a viz Meurz 1794.

(6) Er bloaz 1797.

PEDENN DA ITRON VARIA GOATKEO

WAR AN TON : *O Kalon Zakr.*

DISKAN :

*Roudnez veur Menez Are,
Ni deu d'ho kwelet adarre,
Kemerit truez ouzomp holl,
Mirit ouzomp da vont da goll !*

I

*Mil bloaz a zo, mar ho peder,
E chapel Koatkeo, mamm dener,
Evel hon tadou koz, senoz,
Ni 'choulenn ouzoc'h ho pennoz !*

II

*Tost aman e oa eur c'hastell
A oa d'ar vro oll eur skoazell ;
Danjer warnomp pa zigouezo,
Ouzoc'h ni en em 'erbedo !*

III

*Lakit ar peoc'h en hor parrez
Etre an holl gwir garantez
Ma 'z ay pep tra war well hepred,
Feiz en ene ; er c'horf, yec'hed !*

IV

*Grit ma vezò bugaligou
Ker koant hag an éledigou,
E pep kér o sevel, seder,
Evel nevezennou tener !*

V

*Ar zul eo deiz al levenez
Deiz bras an diskuiz eo hentnez ;
C'houec'h deiz war zeiz a zo d'an den ;
Ar seizvet da Zoue hepken.*

VI

*Diouz al labour start en iliz,
D'ar zul eo e kaver diskuiz ;
Grit ma lézimp pep labour tenn
Edoug an deiz-se penn da benn !*

VII

*Grit ma vezò tud a-verniou,
Bep sul e-harz hon aoteriou,
Ar zul ! ar zul ! na pebez deiz
Da lakat da vleunia ar feiz.*

VIII

*Grit ma 'z aimp holl, gant ho skoazell,
Da iliz an Dreinded santel
Evid ar zul, hep fin ebied,
Ma welimp Dóue en esked !*

Y.-V. PERRON.